

An amzer

Er bloavezh 2010 em boa graet ma soñj sevel ul lec'hienn diwar-benn ma zad Ronan Huon. Ne oa ket splann em fenn ar mod da gas al labour-se da benn met ar pezh a oa sklaer em spered eo e oa a-bouez ober al liamm gant red an amzer : an amzer dremenet, an amzer a-vremañ hag an amzer da-zont. N'eus ket sklaeroc'h tra a soñje din ! Met dre ma 'z aen war-raok em eus meizet ne oan ket sur e oa tri c'houlz-amzer en hon buhez en deiz-hiziv ken.

Galv da lennerien Al Liamm

Ur galv a ris da gentañ ouzh lennerien *Al liamm*, evel-just, da c'houlenn digante degas titouroù din, dielloù, skeudennoù, pe un tamm eus o istor piv 'oar ? liammet gant hini Ronan Huon. Ne resevis keloù nemet digant Jef Gedez. En e lizher da Ronan Huon e lavar ar skrivagner ez ae alies Jorig, tudenn e levr *Brizh Heol (Hor Yezh 1999)* – eñ e-unan – d'ar « *cinéma des familles* nepell eus banell Poulbrikenn » e karter Sant-Mark e Brest. Eno e oa rener *Al Liamm* o chom ! Respont a ra Ronan Huon : « Eveek eo gwelout ul Lannuonad aet da chom da Vrest, skrivañ d'ur “Brestad” aet da “Lannuonad”... »

Hag aet e oa an dud divemor pe me 'oar-me ?

Diwar ar galv-se, emichañs, e voen mennet muioc'h c'hoazh da vont paz-ha-paz da glask sevel istor buhez ma zad a zo bet hini hor familh en he fezh war ar memes tro. Hag e oa eñvor an den-se, evel ur c'horf o veuziñ ne weled mui nemet e benn er wagenn ? Ne oan ket tregaset gant-se pa oa ar gredenn start ennon – hag emañ c'hoazh – ez eo ken birvidik ha ken bev hon sevenadur hag hor stourm evit hon idantelezh a-drugarez d'an holl dud-se o deus bet labourer “hep damant ouzh o foan” ouzh lusk momeder gorrek o amzer, brudet ul lod anezho ha stourmerien disanv evit ul lod all.

Ne vije al lec'hienn-se nemet diwar ur sell strizh neuze ? Ma hini ? Ya, mod pe vod sur a-walc'h. Met a-drugarez d'al lizhiri, d'an dielloù e teufe tudennoù, da zigoriñ dorioù all a soñjas din.

Kav hon eñvoriou

Ar wech kentañ e oa din mont d'ober ur sell war-dreñv e-pad keit-all amzer : vad ha poan war un dro ! Diskenn gant skalier simant an ti da vont da gav hon eñvoriou. Met abalamour da betra ne oan ket diskennet gante a-raok ?

Pep poent eus hon buhez en deus e amzer : koulz ar boued evit ar babig “bremañ soudan !”, an amzer a-vremañ eo an amzer nemetañ evit ar yaouankiz. Brudet eo ar gomz kentañ er pellgomz « *T'es où là ?* Pelec'h 'maout ? ».

Gant ar studi, hor sorc'henoù, ul labour da zont, ar garantez... e teu neuze an amzer da zont da vout ur spi, ar vro nemeti koulz lâret a zispak dirak hon daoulagad, hiraezh d'an deizioù da zont abalamour d'hon hunvre... hag ez a ar vuhez d'an daoulamm evel c'hoarzh ar c'houbladoù a-greiz o divizoù, e-giz pa redont da dapout ar c'harr-boutin da vont e kêr.

Trubuilh, tregas, raktresoù nevez, red ar vuhez hon doug neuze a-dreuz ar mizioù hag ar bloavezhioù o tont, berr eo amzer ar preder, deut eo amzer an divizoù prim. Kas ar mab d'ar skol muzik, ar verc'h d'ar gentel sport, ober prenadenoù evit ar vamm-gaer ha touzañ ar geot dirak he zi. Dastum arc'hant evit ar skol, ur stummadur war an urzhiaterez, kas ar c'harr-tan d'ar c'harrdi p'emañ lutig ar starderezhioù war elum miz zo dija !

Hag hoc'h amzer dremenet ? Hag ho tud ? Mont a rit d'ober ur gwel dezho e-giz ma 'z afec'h da weladenniñ ur maner kozh : sioul eo o buhez, ar momeder na glevit james e neblec'h ebet a son c'hoazh e ti ho tud, evel gwechall. Aze emañ hoc'h eñvorennoù, skeudenn melenaet Joan Baez a oac'h sot ganti, e tu diabarzh armel ho kambr. Gant an oad ez a war nebeutaat an "amzer da vevañ" ha war gresk "an amzer bevet", emañ hon istor, hor buhez, deomp war-dreñv ha gant ar yaouankiz e vez savet pouezioù mod nevez orolaj an amzer da zont.

Lusk an amzerioù

Adkavet em eus evel-just lusk an amzer dremenet a-dreuz al lizhiri, ar skeudennoù... ar c'hasedoù c'hwezh ar c'hozh gante, evel-just...

Goude ar brezel eo bet bevennet an amzer, evit al lod brasañ eus an dud, gant al labour, ar skol evit ar vugale, ar vistriskol hag ar gelennerien, korn-boud an arsanailh e Brest evit ar vicherourien, kloc'h an iliz ur c'hard eur a-raok an oferenn da c'hervel an dud a lakae ur vevenn d'ar Sul ha poent abadenn Charlez ar Gall da unnek eur a oa un emgav all (evidomp) ! An urzh ! An amzer-se a oa anezhañ un amzer boutin d'an holl koulz lâret. Hualet an dud a lâro lod, lusket o buhez a lâro lod all. Un amzer c'horrek a-walc'h e gwirionez. E 1968 avat e oa bet muioc'h a soñjoù nevez dispaket e daou viz evit

na oa bet en tregont vloaz a-raok. Kaoz a voe eus gwirioù ar merc'hed, hini ar vugale, eus butun drol... Fonnusaet e oa talm an orolaj gant traoù all ivez goude-se : gant ar c'harr-tan hag ar pellgomz ; frankizoù nevez evit an holl koulz lâret, er bloavezhioù 80 e kornôg Europa. Ar bedeladur ekonomikel a voulc'he e hent. Ronan Huon, e vignoned, an holl emsaverien a zalc'he da skriverezañ pajennadoù ha pajennadoù skridoù war o zamm mekanik-skrivañ, o c'hase dre ar post d'ar reizherien, int-i o adkase war o c'hiz a-raok ma tegouezhfent e ti ar mouller a-benn ar fin. E-keit-se kelaouennoù e-giz *Keleier an Naoned, An amzer* (peder fajenn sizhuniek)... a doulle un hent darempredet en deiz fenoz gant *Bremañ* hag ar gelaouenn *Ya !...* Ankouet eo bet ar c'hazetennoù-se, met adenkorfet en ur mod bennak ! *Ya !* ha *Bremañ* n'int ket bet ankouet pa 'z int bev c'hoazh.

Ar bed niverel, ur bed prim

Ar stumm niverel am boa divizet ober gantañ evit kinnig istor an emsaver tregeriat Ronan Huon. Ur sell disheñvel diouzh ma hini din ma-unan a ranken kaout hag en em soñjal war an dud a glasken mont daveto. Ul lec'hienn a zo un doare da gaout titouroù, pa garit, diouzh ho c'hoant, un taol-lagad nemetken da wiriekaat ur soñj hep rankout mont tu pe du da glask e levrennoù pounner un holloueziek. Ar peb brasañ eus al lec'hiennoù eo berr ar skridoù enne, e doare ar c'hazetennerzh kentoc'h. Ha perzh bras al lec'hienn eo aaset, difaziañ, gwellaat anezhi, ouzhpennañ titouroù diouzh ma vez. N'eo ket ul levr echu e hent gantañ.

“Aloubet” eo hor buhez gant ar bed niverel : lusk al labour a zo bet tanfoeltret da heul hag an tachennoù da labourat ivez : gant an urzhiataer e c'haller labourat forzh pelec'h, en tren, er gêr, en ul liorz, war greiz an noz, da boent lein pe da c'houlou-

deiz. An den emañ e vicher labourat gant an urzhiataer a c'hell bezañ un den a neblec'h, hep eur ebet d'e ren. « *Un travailleur hors-sol, hors du temps collectif,* » a lâr Noël Timac, enklasker er CNRS. Ur micherour hep bro na ti ha disparti ebet etre e vuhez-labour hag e vuhez prevez a-wechoù.

Lañs gant an amzer

Dre ar rouedad eo keleier fresk dizehan a vez strewet dre ar bed-holl da c'hoût ar pezh a zo bet nevez-degouezhet. Un arm politikel eo deut da vout ar rouedadoù sokial evit ar pobloù, evite da stourm ouzh gouarnamantoù gwaskus. Dec'h eo dija an amzer dremenet ha tri miz zo a zo pelloc'h c'hoazh gant internet pa strink nevezentioù anezhañ dizehan. Pell emaoimp eus ar gwerzioù kozh treuzkaset a di da di d'ar rummadoù nevez da gontañ an istorioù kriz a-wechall !

Marteze n'eus en deiz-hiziv nemet un amzer ken : un amzer difetis koulz lâret diamzeriet ma 'z eo dija keloù ar mintin gant keleier an abardaez. Ne samm mui an darvoudoù nag an traoù pouez na c'hwezh ar pezh a zo chomet da gozhiñ. Un istor a oa gant armel hon zud-kozh, ha zoken gant krazerez-vara *Moulinex* hon yaouankiz... Pa n'o deus an darvoudoù nag an traoù amzer da vont da gozh, skubet gant balaenn an nevezenti, daoust a chom a rafemp yaouank atav ? Skañvoc'h a se an amzer dremenet pa dremen evel un tenn ? Pe daoust ha n'omp ket tapet e-giz un den o vale war ur fun a n'hall ket ober ur sell war-dreñv gant aon d'ober ul lamm-traoñ ?

Hon c'horf avat, emañ war e choug an amzer dremenet – hon amzer dremenet – o vont gant koulzioù-amzer hor buhez, e-giz ur blantenn bouetaet gant sklêrijenn an deiz, aet da vleunienn, da had hag o vont da netra.

Met da belec'h on aet 'ta ? Deomp war hon c'hiz etrezek internet !

Berr e rank bezañ ar c'hinnig war internet, emañ an dud o klask gouzout kalz traoù e berr amzer. Kresket eo ar c'hinnigoù gant filmigoù video, a vez sellet gant kant miliadoù a dud, filmigoù berr-tre div pe deir munutenn d'ar muiañ tout. Gouzout muioc'h a draoù e nebeutoc'h a amzer, bevañ muioc'h a draoù e nebeutoc'h a amzer : bevañ pelloc'h amzer ?

An den mestr war e zivizoù ha war e amzer

N'eus urzh ret ebet ken war meur a dachenn. N'eo ket ret d'an nen selaou ar c'heleier pe sellet ouzh ur film bennak d'un eur merket e-giz ma oa gant ar skinwel un amzer zo bet : diwar e intrudu, diwar e ziviz dezhañ e-unan e ra pep hini e geusteuenn, ma chom mestr ! 'Meta e vefe desachet gant internet evel gant ur maen-touch. Bras an dibab ha frankiz d'an nen da gaout ar pezh a zere outañ.

Buan e teu ar respontoù dre bostel ha prim e ranker bout. Muioc'h a draoù a gaser da benn e nebeutoc'h a amzer, a c'haller lâret met d'ober labourioù don e ranker chom ouzh ar stern e-pad pell c'hoazh.

Dilezet eo ar posteloù gant ar yaouankiz dija ! Re c'horrek ? Fonnusoc'h ez a c'hoazh gant an *SMS* pe gant *Twitter* a ranker skrivañ 200 sin ennañ d'ar muiañ : un haiku mod nevez ?

Met piv ha petra a zo pell pe dost ? Pell emañ ho mignon hag eñ e Bro-India pa c'hallit toullañ kaoz gantañ bemdez ma karit ha gwelet anezhañ a-dreuz lagad ront ur *webcam* e-giz ma vefe stok d'ho ti ? Ha tost emañ ho amezeg nesañ pa ne welit anezhañ nemet ur wech bep tri miz ha ne doullit ket kaoz gantañ evit keloù-se ? Nag al lec'h nag an amzer n'eus gante ar muzul a oa gante tregont vloaz zo.

Hag un dazont a zo gant an amzer dremenet ?

Pell emañ ar paotr eus e lec'hienn evel ma oa Yann eus e gazez ? Pas kement-se. Dek vloaz zo eo marvet Ronan Huon, se zo pell, pell zo evit hon amzer nevez. Nag a zarvoudoù a dreuz ar bed ! Hag e Breizh nag a nevezenti e bed ar stourm sevenadurel, war dachenn ar c'hleweled, ar strategiezh evit kas ar brezhoneg war-raok, ar skol, ar sonerezh. Chomet eo ar skrivañ, al lennegezh war-ruz ? N'eo ket sur, muioc'h a levrioù a vez embannet e brezhoneg, met nebeutaet eo an niver a skouerennoù moulllet, e galleg eo heñvel a-walc'h ar jeu.

N'eus ket ganeomp ken emichañs al liamm "korfel" koulz lâret a oa etre an dud hag o "Istor". Kaoz ar brezelioù ha kalz darvoudoù all e-kerzh ar predoù familh, ken torr-penn evit ar yaouankizoù – n'eus kaoz anezho nemet a-dreuz levrioù, a-dreuz divizoù a-berzh Stad e koun darvoud-mañ-darvoud. An eñvor ne vo ket treuzkaset a rumm da rumm. Graet e oa bet e stal dija da istor ar maezioù ur pennadig zo : ankouaet anvioù ar parkeier, ar gwazhioù-dour, bremañ eo marteze deut poent an ankounac'h a vras ?

Da zerc'hel ur roud eo talvoudus kouchañ an istor war baper, "an istor bihan" dreist-holl pa 'z eo tonket da vout ankouaet da viken pe kouchañ war ur skramm bennak kentoc'h, dielloù a vo miret etre an oabl hag ar stered, war ar c'h-*cloud* a reomp ur sell outañ ur wech bep an amzer ! – gant disfiz ?

Ur c'holl-amzer ar pennad-mañ ? Pulluc'het eo ar penn-*yar* er forn a-benn bremañ ? Gleb dour-teil eo al liñserioù a oa o tisec'hiñ er-maez ? Ankouaet ganeoc'h mont da bremañ ur pizza ? Koulz eo deoc'h chom e goudor klet skramm ho urzhiaterez ha skrivañ war ho klavier gant ho pizied gweñv :

ronanhuon.net